

# KROAZ HA PRESBITAL ZANT-ELER

BINNIGET

## GAND ANN OTRO 'NN ESKOP

*ar 17 a viz Gouere 1881*

---

Grenn dostik da Vene Bre, enn tu ann hanter-noz,  
 Ma tremen ann hent houarn ebarz e traou ar roz,  
 A zo eur barouz neve, zo hanvet *Zant-Eler* ;  
 Mar teurveet mont eno, c'houi a welo treo kaër.

Arog ma defoa beleg, defoa foar ha pardon.  
 Diout-hi e ve komzet ebarz e pep kanton ;  
 A bep tu, di, a vanden, e teu tud ha loenet ;  
 Ar mestro gand ho c'hezek a weler o tonet.

Na vezo den estonet o welet Bretonet  
 O tont da bidi ar zent evid tud ha loenet.  
 Ar pezh a zivoal Doue a zo divoallet mad.  
 Ia, hon fe, daoust d'ann Ifern, a ielo war grenvad.

Zant Eler oa micherour, gwiek enn he vicher ;  
 Ha mar plijaz d'ar Roue he labourio ken kaër,  
 Da Zoue e kinnige he labour, he beden.  
 Nep a c'houlen gras Doue a bep tra deu a benn.

Mes buan tro he galon war zu ann ineo ;  
 Setu hen Eskop zantel, vel a zo enn hon bro.  
 Mar z'eo ken kaër he barouz, eo graz d'hon Eskob mad  
 N'euz dibabet eur Person, gwelloc'h na n'oufer kad.

Ne hallan ket diraz-han meuli he labourio ;  
 Kaëroc'h na ve ket gwelet neb lec'h ebarz er vro.  
 Zellet euz he Bresbital ; he dourio 'zav enn er,  
 Ha tro-war-dro eur jardin hen laka ken zeder !

Er jardin-ze eur gador zo gret e mein kalet ;  
Eleiz a dud anoudek a zeuio d'he gwelet.  
Mar z'eo kador ann Eskop, evel ma hel lerer,  
Me zaoulino diraz-hi, da bidi zant Eler.

Mar beo ho person karet eunn nebeud blavejo,  
C'houi po eunn Iliz neve, vel a rer dre hon bro.  
Ia enor d'hon beleien ! E m'aint er renk kentan ;  
Labourat vid gloar Doue a reont hep skuizan.

Hep skuizan vid gloar Doue a labouront bepret.  
Mes chouk ann Otro Pastol a dle bezan pleget ;  
He ialc'h zo koustet d'ehi ; mes gret en deuz treo kaër.  
Hon Eskop mad a laro : Na goll ket he amzer !

Ar groaz zo bet binniget gand hon Eskop zantel.  
Na dlean ket he meuli, n'halfenn ket ober wel.  
Zant Eler, war ann ti-man, war he barouz neve,  
Ha war ho touar breman denno bennoz Doue.

Aboue ma deuz eur belek, ann dud zo estonet  
O welet Bourg zant Eler pegement eo kaeret !  
Rag a bep tu na weler nemed tier neve.  
Ze ziskoue ne ket noazuz karet belek Doue.

Dre-ze ar guir Vretonet a gar ho beleien,  
Bepret ho deuz karante evid ho Eskibien ;  
Ha mui d'ho Eskop zantel a zo aman hirie ;  
Rei a rafent evit-han ho goad hag ho bue.

Eleiz a vezo zavet ilizo ha kroajo,  
Ha dalc'het skolio kristen vid hon bugaligo,  
Ha zavet tier neve vid hon beleien vad ;  
C'houllan ket unan dister vid person Louargat.

Evel bretonnet kalet ni dalc'ho mad d'hon fe ;  
Hon fianz e lakefomp e madelez Doue ;  
Ha ma welomp enn hon zouez eunn danvad galoused,  
Ni bellaio diout-han gand aoun rag he glenvet.

Me a c'houlen a galon ho pennoz, Eskop karet,  
Epad ma c'hellin kana, 'talc'hin da gizellet.  
Gand ho peleien zantel, ebarz er paroujo,  
Me boanio, hed ma bue, d'ober zent ha kroajo.

ERVOAN HERNOT.